

26. Mari deuz ive dizamet,
Kalz groaguez a iça ken poaniet,
Hag obtenet digant Doue
Ar Vadiziant d'ho bugale.
27. Ia, penauz guellout niveri
Ar re zo dleourien d'euzhi,
Euz ho yec'het, euz ho danve,
Hag ouzpen c'hoaz euz ho bue!
28. Nag a vürzudou, christenien,
Ne c'hell ket an den ho c'hompren,
He deuz groet ar Verc'hez Vari
El lœc'h-ma ken karet ganthi!
29. D'ar guenta sul a viz Guere,
Gant ar brassa solennite,
E vez groet ato ar pardon,
E Comfors gant devotion.
30. Daoulinet neuze dirazhi,
Oh! pedomp a galon Mari,
Da gaout sonj ac'hanomp ato,
Dreist peb tra en heur hor maro.

P E D E N

Guerc'hez Vari, hor Mam dener,
Ni a zeu da dreid oc'h auter,
Evit pedi ho madelez,
Da gaout ouzomp bepred truez.

Pa z'oc'h refuj ar bec'herien,
Plijet ganeoc'h d'comp-ni obten,
Digant Jesus, hor guir Autrou,
Pardon euz hon oll bec'hejou.

Epad ma vimp var an douar,
En draonien-ma leun a c'hlaç'har,
Grit ma vezimp d'euzhan fidel,
Ha d'eoç'h ive, betek mervel.

O Itron Varia Comfors,
Hor rênit var eon d'ar pors,
Euz an eürusdet eternal
Da velet an Dreindet santel!

Imprimatur : Corisopiti, die 5 Decembris 1911.

A. COGNEAU.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.



KANTIK

Itron Varia Comfors.

Ton : *Me ho salud Stereden vor...*
Pe : *Jesu, dulcis memoria...*

1. Melaris, bezit leun a joa,
Da gaout eur Chapel ar gaëra ;
Henni Mam Doue, ar Verc'hez,
A gar diskuez he madelez.
2. Ia, er Chapel-ma benniguet,
A zo kement darempredet,
E Comfors, guir Vam Hor Zalver,
A skuill he grasou heb niver.
3. Heno, biskoaz den na bedas
A greiz kalon, gant fizians vras
Anez beza bet selaouet
Gant Rouanez an oll Cælet.
4. Ar Vam-ze ker mad, ken brudet,
Bepred he deuz bet sikouret,
An den just da berseveri,
Hag ar pec'her da zistroi.
5. Obten a ra digant Doue,
Yec'het d'ar c'horf ha d'an ene ;
Hag e lœc'h an dristidiguez,
E tigas laouenediguez.



6. Dre zorn Doue oll galloudec
D'ar re vut e ro ar prezec,
D'ar re vouzar gless ar c'hlevet,
Koulz ha d'ar re zall ar guelet.
7. An dud kam, an dud mac'haniet,
Goude beza Mari pedet,
A zistro leun a joa d'ar guer,
Heb kaout izom euz ho bizier.
8. Christenien eta, me ho ped,
Mar klaskit ar guir eürusdet,
Deuit gant joa betek Mari
Evit kaout sikour diganthe.
9. Tadou, mamou, c'hui marteze,
A renk hirvoudi noz ha de,
Var eur verc'h, var eur mab diroll,
Dre ma zint wall skuer 'vit an oll.
10. Westlit anezho gant fizians,
D'an Hini zo an esperans ;
Hi eo ar feunteun a vue,
Hag a zilvidiguez ive.
11. Gant eun dorn leun a drugare,
Digass a rañ ho pugale,
Var an hent mad ho deuz kollet,
Siouaz dezho, dre ar pec'het !
12. Ha c'hui oll a zo er bed-man,
Ken dilezet gant peb hunan,
Kollet ganec'h ho tad, ho mam,
En eun oad yaouankic flam.
13. Deuit, c'hui dreist-oll, emzivadet,
Da dreid he auter benniguet,
D'he fedi stard, pa zeo ker mad,
Da guemer truez ouz ho stad.
14. Har ar Vam-ze, leun a zousder,
Ho sikouro e peb amzer ;
Mari bepred ho conforto,
Ha deuz peb anken ho miro.
15. Tud yaouank, mar fell d'eoc'h ive,
Kenderc'hel e servich Doue,
Oc'h heuill bemdez ar vertuziou,
Hag o toec'het deuz ar viçou ;
16. Savit heb aon ho taoulagad,
Etrezek ho Patronez vad,
Ha Guerc'hez an oll guerc'hezet,
Ho tiwallo deuz ar pec'het.
17. Diredit ive, pec'herien,
Da gaout mam an oll gristenien ;
He divroc'h he deuz digoret
Frank evit ho tiguemeret.
18. Oh ! pedit-hi a vir galon,
Hag ho pezo grac ar pardon ;
Daoust petra c'helfe refus
Jesus, d'he Vam garantezus ?
19. C'hui, Guerc'hez, zo eur renourez,
En hent euz ar zilvidiguez ;
C'hui a rô nerz e peb mare,
D'ar beachour skuiz o vale.
20. Var ar mor ha var an douar,
E kreiz an trubuil, ar glac'har,
Mari e peb loec'h a zifen
Ato he guir zervicherien.
21. An Itron Varia Comfors,
A zigass dizanger d'ar pors,
Ar martolod ken trubuillet,
Dre ar mor rust pa renk kerzet.
22. Soudardet christen Breiz-Izel,
E kreiz an tân euz ar brezel,
Ho deuz bet santet aliez
Peguen braz eo he madelez.
23. Rac-se pa zistroont d'ho bro,
Goude m'int bet troec'h d'ar maro,
Ho gueler o tont a vanden,
Ha gantho peb a c'houlouen.
24. Da drugarekaat assamblez,
Mari, ho madouberourez,
Da veza bet ho diwallet,
Pa oant e riskl beza lazet.
25. Ped guæc'h c'hoaz n'he deuz ket mouguet
Mari, an tân wal fuloret !
Ato Mari he deuz remed,
Ouz peb drouk ha peb seurt klenvet.